

## VI

A uz d'hor penn, o Gwerc'hez,  
 Ar goabren zo tenval,  
 Kaif, Pilat, Herodez  
 O deuz c'hoaz breudeur fall;  
 Grit eur zell a drugarez,  
 Hag ar goabren faoutet,  
 Ar sklerder zeo a nevez  
 Gant an heol alaouret.

## VII

Er Raz ar mor kounnaret  
 Euz ar garrek a sko,  
 Ar roc'h n'eo ket dispennet,  
 Stard mad a jomm ato;  
 Dirag kounnar an dud fall  
 Ni jomm vel ar garrek,  
 Rak c'hwi a oar hon diwal,  
 C'hwi Mam hag ar beleg.

## VIII

Skuillit var al labourer  
 'Vel var an den a vor,  
 Ho pennoziou hep niver,  
 Rouanez dous Arvor!  
 Kennerzet gant ho skoazel,  
 Holl, beteg ar maro,  
 Bepred ni stourmo fidel  
 'Vit Doue 'vit ar Vro!

IMPRIMATUR :

Quimper, le 10 Août 1921.


P. MESSEGER, *Vicaire général.*



## KANTIK

## Intron Varia Langroaz

(Mater Dolorosa)



Ton : *Patronéz douz ar Folgoat.*

## DISKAN

Intron Varia Langroaz,  
Mamm garet ho Zalver,  
Holl d'ho chapelik bep bloaz.  
Ni a zired seder,  
Da lakat e harz ho tron  
Hor poaniou, hon enkreuz;  
Da zigori hor c'halon  
D'ar Vamm a drugarez.

### I

E parrez Kleden, savet  
War bord eun droanien c'hlaez  
Ho chapelik ken karet  
Zo goloet a wez braz;  
Savet eo bet 'vit deski  
Da gristenien ar vro  
Ho klac'har, ho melkoni  
Dirag Jezuz maro.

### II

N'eur welet e holl boaniou,  
E c'hoad, e gurunen,  
E gorf goloet a c'houlou  
Ganeoc'h war ho parlen;  
An anken vel eur c'hleze  
Ho kalon a dreuzas.  
Biskoaz mam en e bue  
Kement a c'houzanvas!

## III

Abaoue naontek kantved,  
Poaniou ho map Jezuz  
Siwaz vez renevezet  
Dre ar pec'hed euzuz.  
An den a zo ken dister  
Ma teu d'ankounac'hat  
Ar boan a ra d'e Zalver  
Ha deoc'h, Gwerc'hez ken mad!

### IV

N'ho chapelik, o Gwerc'hez,  
N'eur welet ho klac'har  
Ni bromet gant karantez  
Ne vimp mui ken digar.  
Pardonit, o Mam dener,  
Ni zo ho pugale,  
Ha! gounezit hor Barner;  
Bezit ouzomp true!

### V

Intron Varia Langroaz,  
Hor Mamm garantezuz,  
Grit n'ankounac'himp biskoaz  
Pasioun ho map Jezuz;  
Skrivit down e bemp gouli  
E gweled hor spered,  
Grit ma vagimp kasoni  
'Vit kement zo pec'hed.